


AR PASAJEREZ



eur plac'h yaouank a gêrig Sant Malo, eur plac'h yaouank
 a gêrig Sant Malo, pa-sa-je-rez war vor-
 dig rinier Gouelo, pa-sajerez war vordig rinier Gouelo

1. Eur plac'h yaouank a gêrig Sant Malo
Pasajerez war vordig rinier Gouelo.
2. Daou den yaouank a deu d'he darempredia
Unan eus anê a gemere jalouzi.
3. Unan eus anê jalouzi 'n neus kemeret,
Ya, gant an aon 'dije ket hec'h amourusted.
4. " Koantennig koant, koantennig, din leret,
Pegement e kousto din ka't hoc'h amourusted.
5. - Kant lur, emei, en arc'hant gwenn asuret
A gousto deoc'h ka't ma amourusted.
6. E-lec'h kant lur, koantennig, a c'houlennet
E-lec'h kant lur, koantennig, a c'houlennet
7. C'hwi pe'o daou, tri, ya, pevar mar keret,
Koantennig koant, c'hwi po ar pezh a gerfet."
8. Ha p'int arru en aod ez int dizambarket
Da c'hoari e well-bactr, an Aotrou 'zo 'n em laket.
9. Aotrou, emei, ur momed pasianted
Me 'wel aze eur c'hastell lec'h ma vezimp lojet,
10. Hag eur gwel-pluñv, liñselioù dourampezet
A zo warnañ eur gonterpoentenn fleuriet,
11. Hag a-us dimp rideozioù dantelezet
Hag eun aval-orañjez e pep a benn anezhañ,

12. Hag eun eostig bihan koant 'vez er c'hreiz o kanañ :
 " Koantennig koant, me 'garje bezañ ennañ...
13. Ha pa vin arru er gêr din-me e vo krozet
 'Blamour d'an arc'hant am eus-me deoc'h roet.
14. - C'hwi 'lavaro dei e oac'h bet en dour kouezhet
 O tremen ar rinier, darbet deoc'h bezañ beuzet.

Kanet gant Soaz an Digerc'her, Ploubêr,
 2/6/52 : kanañ a rae war ur ventadurezh laosk awalc'h
 oc'h astenn hag o kemmañ ar sonerezh diouzh ezhoñm ar
 gerioù.

Evit an ton, keñveriañ gant Duhamel, Musiques
 bretonnes, niv. 297: heñvel eo ar mentadur, met war
 vuzelioù Soaz an Digerc'her eo bet treuzlec'hiet ar
 mod er skeul-gan re ken karet gant Tregeriz.

Evit ar c'homzoù, sellout ouzh Sonioù an Uhel,
 Levrenn 1, pajenn 198.

